

YF_0112_Kimiad ar martolod breton o vond d'ar Chin

'Vel eur gouelan, lein an oablou,
Ma lestr e oueliou digor
Zo gwentet gant an aveli
Pell dimeuz aochou Arvor.

Dizeblant ouz an disparti,
Ar vartoloded a gan
O sperejou 'zo dizoursi,
Ma hini me 'zo en poan.

Ma c'halon baour a zo gwasket
Gant ar bec'h ar pounneran,
N'on pe drouk enni 'zo skoet
Pa 'm-eus taolet troad aman.

Pignet en beg ma gwern uhel,
Na zistagfen ket ma zell,
Na pa vije red din mervel,
Diouz douarou Breiz-Izel.

Pa welan 'vel eur vogeden
O teuzi aochou Arvor,
Ma daerou taken-ha-taken
A gouez goustadik er mor.

A-boan e tarz c'hoaz an douar
'Tre an dour hag ar goabren
Kenavo, Breiz, ma mamm, ma c'hoar,
Ma c'harante da viken !

Me da gar ha n'hen gouien ket
Kousket en poull ma c'halon,
Ma c'harante zo dihunet
Bremen ha hi kre ha don.

Kenavo 'ta, reier, dero,
Kenavo traez ha bili,
Rag hirie me a zoug kanvo
D'ac'h holl hini ha hini.

Kenavo, touriou, iliz koant,
Ha kilheier lugernus,
'Glevin ken ho kleier arc'hant
O seni an Angelus.

Kenavo, ma ziik balan !
Me wel duze, 'toull da zor,
Eur vamm glac'haret o ouelan
He zellou troet er mor.

Kenavo, ma bagig vihan.
Pell e vezi 'n es kourve,
Disliv ha reud en es lian
Evel eur c'horf hep ene.

Na gouskin ket nozveziou hanv,
Ennoud evel 'n eur c'havel,
Ar wagen dindan o kanan,
Hag an avel o luskel.

Trouz ar c'hanol 'vel eur c'hurun,

Ha skrij trompilh an argad,
A deuyo bemde d'am dihun
Ha bep noz d'am luskellad.

Kenavo, Breiz, a greiz kalon,
Kenavo, Breiz, a bouez penn
Da ano a dougin, breton,
'Vel ar groaz 'zo 'n em c'herc'hen.

Ha gant ar groaz en e vruched
Ha da ano 'n e c'heno,
Da vab na vo biken trec'het
Nemet gant dorn ar maro.

DIR - NA - DOR.